

250
ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



Kristen ha Breizad da virviken.

AR MAB FORAN

Mister santel en eun arvest



BREST

Moullerez ru ar C'hastell, 4

1922

ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor




Kristen ha Breizad da virviken.

891-
682

AR MAB FORAN

Mister santel en eun arvest



BREST

Moullerez ru' ar C'hastell, 4

1922

Oberou A. de Carné, Barz an Arvor⁽¹⁾

Breiz karet, pezh-c'hoari e tri arvest.
Ar yalc'had aour, c'hoari farsus en eun arvest.
Ar mabig Jezus, mister kristen en eun arvest.
Kristof ar C'hreno, mister kristen en eun arvest.
An aotrou Flammig, c'hoari farsus e daou arvest.
Tarsisius, mister kristen en eun arvest.
Saig ar paotr fin, c'hoari farsus en eun arvest.
Barnedigez Doue, mister kristen en eun arvest.
Sac'h ar marichal, c'hoari farsus en eun arvest.
Judikaël, mister kristen en eun arvest.
Ar galoun vat, c'hoari plijadurus en eun arvest.
Ar c'hoz vedisin, c'hoari farsus en eun arvest.
Lilien ar Folgoat, mister kristen en eun arvest.
Ar mab foran, mister santel en eun arvest.

EVIT AR MERC'HED BIHAN

Noz nedeleg, mister kristen en eun arvest.

⁽¹⁾ Ar pesiou ma a gaver e Brest, e moullerez ru ar C'hastell, 4.



ARGUMENT

Mesraïm prend en horreur le travail, la joie et la paix qui règnent dans la sainte maison de son père. Il la quitte pour suivre, dans l'infamie et la paresse, trois jeunes viveurs de la décadence romaine, qui l'ont corrompu et entraîné. Quand ces derniers l'ont complètement ruiné, toute l'admirable parabole de l'enfant prodigue se déroule, en action, dans ce petit drame. Mesraïm devient gardien de pourceaux dans un pays désolé par la famine. Purifié par l'épreuve et le repentir, il retourne chez son père, qui le reçoit avec des larmes de joie, et ordonne des fêtes magnifiques en son honneur.

Ainsi, je vous le dis, il y a de la joie devant les anges de Dieu pour un seul pécheur qui fait pénitence.
(Luc, XV, 10 à 32.)



Diocèse de
Quimper & Léon
Evêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

TUD AR MISTER

ABIMAEI, tieg pinvidik.

ELAM, e vab hena.

MESRAIM, e vab. (*Ar mab foran.*)

GOMER, mevel koz, e ti Abimael.

ASSENEZ, mevel yaouank, e ti Abimael,

ELIFAZ, labourer douar.

HEBER, e vevel, paotr ar moc'h, lous ha divalo.

FLAVIUZ, ginidik eus a Rom, kanfard, pinvidik mor.

SERVUZ { Kanfarded, ouz e heulia.

RUFUZ }

HADAR, barz ha kaner, Kanerien ouz e heulia.

Eur c'hasker bara, den koz ha santel bras.

Eur paotrig pemp ploaz, gantan.

Mevelien e ti Abimael.

*An dra ma a dremen e broiou ar sao heol, araok
donedigez hor Zalver.*

KENTA LODEN

1 DIVIZ

GOMER, *e unan.*

Done galloudus a garan a greiz va c'haloun, ho pidi a ran start, evit ma tennot, diwar va ene, an nec'hamant a zo o poueza warnan. Mevel oun e ti Abimael ouspenn daou ugent vloaz zo, ha n'em eus ket bet, beteg hen, eun dristidigez ker bras hag an hini am eus breman. Mesraim, mab yaouank va mestr karet, a zo fall ha dizanaoudek evit e dad. Petra a rin me, Done mat ? Penaos e c'hellin me frealzi ha kennerza ar paour keaz tad ? Her gwelet a ran, duhont, o tont davedoun.

Petra rin me ? Done hon tadou koz, deuit d'am zikour.

2 DIVIZ

GOMER, ABIMAEI.

ABIMAEI

Te a zo tenval da zremm, Gomer, hirio evel deac'h.

GOMER

Ha gant gwir abeg eo, mestr. Gouzout a rit, ker-koulz ha me, evit pe tra an dristidigez a zo kouezet war ho spered d'eoc'h c'houi, evel war va spered d'in me. Ha n'ema ket Mesraim er gear ?

ABIMAEI

N'ema ket. Daou zervez zo abaoe m'eo eat kuit gant daou pe dri lakepod eus ar re waza. Pegouls e teuo en dro adarre ? N'oun ket evit her gouzout.

GOMER

Pa blijo gand an Aotrou Doue, mez kentoc'h eget na zonzit, marteze. Gwelet a ran Assenez, ho mevel yaouank, o tont etrezeg ennomp, eur paper gantan en e zourn. Kelou en deus, a gav d'in, da rei d'eomp. Bez' ez eus eur c'helou bennak, Assenez ? Lavar 'ta.

3 DIVIZ

GOMER, ABIMAEI, ASSENEZ.

ASSENEZ

Ne ouzoun tra, Gomer. N'em eus ken tra da ober nemet rei d'hor mestr ar paper ze bet roet d'in, n'eus nemet eur pennadig, gant tud a lignez vras, m'edo Mesraim ganto.

ABIMAEI

Ro ar paper. *O lenn*. Flaviuz, den pinvidik mor ha galloudus bras, kenderv d'an impalaer, niz d'ar pefed Rom, a ro da anaout, da Abimael, en deus traou a bouez bras da lavaret d'ezan. Goulen a ra ma vo lezet da vont da gaout Abimael, evit komz outan diwarbenn an traou ze

GOMER

Taolit evez outan, va mestr ker. Evidoun me a zo bras kenan va disfizians en e genver. Anaout a ran an den yaouank-se a reer Flaviuz anezan. Pa vezont

a du, o daou. Mesraim hag hen, an eil gand egile, krena a ran evel eur bern deliou. Flaviuz a zo e guzuliou ker fall ha re an drouk spered.

ABIMAEI

Rak se eo, Gomer, e fell d'in gouzout ar pezh a c'houlenn diganen ar gwall baotr se.

Assenez, kea da lavaret d'ezan dont ama. *Assenez a ya kuit*.

4 DIVIZ

ABIMAEI, GOMER.

ABIMAEI

Va selaou, Gomer ; setu ar pezh a c'houlennan diganez. Chom a ri eun tammig pelloc'h. Me az kalvo mar bez red, mar teu an traou da drei fall gand an dorfedourien ze. *Gomer a ya kuit. Flaviuz, Servuz, ha Rufuz a zeu*.

5 DIVIZ

ABIMAEI, FLAVIUZ, SERVUZ, RUFUZ.

Servuz ha Rufuz a ya da azeza pelloc'hik.

FLAVIUZ

Me ho salud, Abimael. Deuet oun, evel m'em eus lavaret d'eo'h, evit traou bras a zell ouzoc'h. Daoust hag anaout a rit al lezen nevez savet gand an impalaer ?

ABIMAEI

Pe lezen ?

FLAVIUZ

Al lezen a ro d'ar vugale ar gwir da c'houlenn o loden zannev araok maro o zad,

ABIMAEL

Anaout a ran, evit ar gwella, al lezen fall ze. Mes petra a ra an dra-ze d'eoc'h ? Daoust ha c'houi eo va mab ?

FLAVIUZ

Me n'oun ket ho mab, a dra zur. Mez a berz ho mab eo e teüan.

ABIMAEL

A berz va mab ? Perak ?

FLAVIUZ

Dre ma ne gred ket dont e unan.

ABIMAEL

Ha perak ne gred ket dont heman ? Abalamour ma 'z eo divalo ar pezh a ra. *Krenv e vouez*. Me a c'hourc'hemen d'eoc'h ho tri mont kuit, raktal, a zirak va daoulagad.

FLAVIUZ, *kounnar ennan, krenv bras e vouez*.

Ha ni jomo, p'eo gwir emaomp aman en hano al lezen. *Elam a zired en o zouez*.

6 DIVIZ

AN HEVELEP RE, ELAM.

ELAM

Petra eo an trouz se a glevan ? Petra a fell d'ezo an dud se ?

ABIMAEL

Lakaat ac'hanoun, va mab, da rei d'az preur Mesraïm e loden eus hor madou.

ELAM, *droug ennan*.

Brao kenan ! an dra ze a zell ouz va breur, mes ne zell ket, tamm ebet, ouz an tri ze. *Rufuz ha Servuz a zav, hag a zeu etouez ar re all*.

RUFUZ, *o tiskouez eur paper*.

An dra ze a zell ouzomp evit ar gwella. Setu eul lizer skrivet gant Mesraïm, hag a ro d'eomp ar gerfridi da zont da gaout ho tad. Sellit ; sinet eo gant Mesraïm.

SERVUZ, *o tiskouez eur paper all*.

Ha ma ne fell ket d'ho tad rei e loden da Vesraïm dre gaer, he rei a raio dre heg. Petra eo ar paper ze ? Eur paper d'her gervel dirak ar varnerien. Sellit. Skrivet eo bet en hano Mesraïm.

ABIMAEL, *tenva e zremm*.

Doue trugarezus ! Na peger kriz, na peger fallakr eo ar bugel ze hag a garien kement.

ELAM

Bezit dinec'h, va zad ker, bezit dinec'h.

Abimael a ya da azeza, glac'haret.

Unan ac'hanoc'h en deus ar paper a c'halv hon tad dirak ar varnerien. Mat ; ni a yelo holl a unan neuze. Rak me ho kalvo dirak ar varn ive, c'houi ho tri, hag e tisplegin d'ar barner ho troiou kamm, ho torfejou, zoken.

FLAVIUZ

Diwal, Elam, diwal. Me a zo bras va gallond, kenderderv d'an impalaer evel ma 'z oun.

ELAM

Ha pa ve an diaoul da genderv, n'em bije ket an distera spount dirazan. Perak e fell d'it lakaat va zad, en despet d'ezan, da rei e loden madou da Vesraim ?

RUFUZ

Dre ma 'z eo Mesraim hor mignoun ker.

ELAM, *droug bras ennan.*

Gaouiad divez ma 'z out. N'anavezomp ket, a gav d'it, ho toareou, d'eoc'h ho tri ? N'ez' eus nemet eur mennoz en ho spered, laerez an arc'hant a vezo roet da Vesraim gand hon tad.

FLAVIUZ

Gwall hanoiou a levere, Elam. Te a baeo ker da zismegansou.

RUFUZ

Da vro a zo dindan galloud ar Romaned. Taol evez, Elam, taol evez.

SERVUZ

N'hon eus nemet eur gerig da lavaret ha te, da dad, da vevelien a vezo, raktal, lekeat da sklaved dindan ar Romaned.

ELAM

Roit peoc'h d'in gand ar Romaned, na rit nemet

komz anezo atao hag atao. N'omp ket Romaned, ni, a drugarez Doue.

FLAVIUZ, *o c'hoarzin hag o c'hoapaat.*

A drugarez Doue ! a drugarez Doue ! pe seurt Doue ? N'eus nemet eun doue hepken, ar blijadur.

ELAM, *o c'hoapaat ive.*

Ia zur. Al loened mud n'o deus, ive, ken doue nemet o flijadur. Glabouset hoc'h eus awalc'h. It kuit er meaz, ho tri, buhan ha buhan.

Flaviuz, Rufuz ha Servuz a denn peb a c'hourgleze a zindan o saeou.

FLAVIUZ, *o c'hourdrouz.*

Deus 'ta, Elam, deus da deurel ac'hanomp er meaz.

ELAM, *hep aoun ebet.*

Ne vo ket diez. *O c'hervel.* Gomer ! Assenez ! ha c'houi holl, deuit da gas er meaz an tri ganfard ma, a dorr hor penn d'eomp.

7 DIVIZ

An hevelep re. Gomer, Assenez ha daou pe dri vevel all a zired gant bizier ha ferc'hier, hag a laka an tri ganfard da vont kuit buhan, ouz o c'has er meaz en o raok.

8 DIVIZ

ABIMAEI, ELAM.

ABIMAEI

E peleac'h ema da vreur paour, va mab ?

ELAM

Er gear, va zad. Deut eo en dro gand an tri labous divalo ze. Ha c'houi a fellfe d'eoc'h komz outan, marteze ?

ABIMAEŁ

Ia, va mab. Kea d'her c'herc'hat, mar plij ganéz.

ELAM

Ne ran nemet mont dont, va zad. *Elam a ya kuit.*

9 DIVIZ

ABIMAEŁ, *e unan o sellet ouz an env.*

Breman eo em eus ezom eus ho nerz, Doue mat meurbed, breman eo em eus ezom eus ho sikour. Va faour keaz mab a yelo kuit. Ne jom e va spered mar ebet war gementse. Roit d'in, me ho ped, eur galoun grenv, da zougen va foan.

10 DIVIZ

ABIMAEŁ, ELAM, MESRAÏM.

ABIMAEŁ

Deus, Mesraïm, ha te, Elam, chom aman ive ga-neomp. Me a fell d'in ma vezi test eus ar pezh a dre-meno etrezomp.

ELAM

Chom a rin, va zad.

ABIMAEŁ, *da Vesraïm.*

Me zo bras va foan, va mab. Da genta, emañ o

vont kuit ; d'an eil, lakaat a rez divroidi da c'houlen diganen, eus da berz, da loden madou, eleac'h he goulenn te da unan, An dra ze eo a ra, dreist-holl, va rann galoun.

MESRAÏM, *rog.*

Ne lavaran ket, va zad, mes ne ran fors me. E ve roet d'in va loden e c'hiz pe c'hiz, e ve goulennet diganeoc'h gant va mignouned, eus va ferz, pe ganen me va unan, kementse ne ra netra d'in. Skuiz maro un gand ar c'hoz ti ma, n'ez eus, ennan, na plijadur, na levez euidoun. N'oun ket, me, eur paotrig, eur bugelig. Ugent vloaz am eus. Me fell d'in beva dioc'h va giz ha dioc'h va frouden. Me fell d'in c'hoari, ebatal, ha diverraat an amzer.

ELAM, *droug ennan.*

Gant mignouned kaer, a dra zur, dreist holl mard-int henvel ouz ar re hon eus kaset kuit evel chas.

MESRAÏM, *droug ennan.*

Va mignouned a zo va mignouned, Elam. An dibab am eus great anezo ne zell ket ouzit, breur. N'out ket va zad, emichans.

ELAM, *droug bras ennan.*

N'oun ket, sur eo. Ma vijen bet me da dad, bez dinec'h, me am bije taolet va malloz warnout, a-bell zo.

ABIMAEŁ

Na gomz ket er c'hiz se, Elam. An Aotrou Doue hepken a zo gantan ar galloud hag ar gwir da deurel ar mallosiou. Me n'her grin ket war unan eus va bugale, peger bras bennak e ve e zizanaoudegez em

c'henver. Mes ne jomin ket, kennebeud, da varc'hata gantan ; ne jomin ket da c'hortoz ken n'am galvo dirak ar gador varn. Nan ; kaloun va mab a zo deuet da veza eur zac'h da lakaat arc'hant. Emaoun o vont d'he c'harga and aour, *Abimael hag Elam a ya kuit*.

11 DIVIZ

MESRAÏM, *e unan*.

Ne ket re abred, sur. Nag a boaniou ! Nag a lava-riou ! Eur paour keaz den yaouank a zo diez bras d'ezan dont a benn eus e daol, dioc'h a welan. Kredi a rean n'em bije ket bet morse va loden. Mes breman, avat, me a zo laouen va c'haloun, ha dibreder va spered. Petra a gaver aman ? Kreier lous ha flerius, berniou teil brein, c'houez fall ar zaout hag ar moc'h. Evidoun me a gav gwelloc'h kalz c'houez vat ar roz ruz hag al lore ma rin ganto kurunennou dispar evidoun. Pa vezer brao ha koant evelvoud me, an ebatou, an enoriou, ar c'hloar, zoken, a zeu anezo o unan. En em veuzi a rin en eur mor a blijaduresiou.

12 DIVIZ

MESRAÏM, ABIMAEI, ELAM.

Kountet em eus, Mesraïm, dirak Elam. da vreur, al loden madou a zo d'it. Rakse, lekeat em eus eur zac'had aour er c'harr a gaso ac'hanout d'ar gear dosta. Gwir ac'h eus da gaout eun drederen eus hon danvez, an diou drederen all o chom gant da vreur ha ganen. Pounner eo ar zac'h ha n'oun ket souezet ; bez' ez eus ennan dek mil bez aour. Ha breman, va mab, te a falvezo d'it, me a gred, poket d'az tad paour, araok mont kuit.

MESRAÏM. *didruez*.

N'her grin ket, va zad, gand aoun na zinerzfe va c'haloun o poket d'eoc'h, ha red eo d'ezi beza krenv, beza kaloun eun den.

ABIMAEI. *tenval bras e zremm*.

Kea, va mab ; gwela a ri, ha dizale. Goulen a ran start, digant an Aotrou Doue, na redo ket goad eleac'h daelou dioc'h da zaoulagad. Kea gant da hent, va mab karet. *Abimael hag Elam, enkrezet bras o daou, a ya kuit*.

13 DIVIZ

MESRAÏM, *e unan, d'an .dud, o c'hoapaat*.

Goad eleac'h daelou ! Ma n'eo ket eun druez ! Ne vezo ket a zaelou ganen, e kreiz an ebatou, ar c'hoariou hag ar banvesiou. Nan ! nan ! Sellit 'ta ! piou eo ar c'hoz krign askourn ma a zeu aman ?

Eur c'hlasker bara koz a zeu, eur paotrig gantan.

14 DIVIZ

MESRAÏM, AR C'HLASKER BARA, AR PAOTRIG.

AR C'HLASKER BARA

Eun tammig bara d'in, mar plij, aotrou mat, en han' Doue.

MESRAÏM, *o c'hoarzin iud*.

Bara ? Bara ? Ne roer bara nemet d'ar re a labour, pezh didalvez. N'eus bara nag evidout nag evit da louarnig lous.

AR C'HLASKER BARA

N'oun ket evit labourat, aotrou mat, koz ha klanv
evel ma 'z oun.

MESRAÏM

Gaouiad ma 'z out. Ar re glanv a jom en o zi.
Kea d'az toull, ki koz ! boued ar gounnar ! Kea 'ta !
*Bunta a ra ar paour ha skei gand ar paotrig. O
c'has kuit a ra gant krisder.*

EIL LODEN

15 DIVIZ

ELIFAZ, *e unan.*

N'em eus gwelet morse kemend all a zienez, ke-
mend all a baourentez, kemend all a boan. Ar par-
keier a zo bet rostet gand an heol. Ar gwez a zo
difrouez. Ar gwasiou dour, ar feunteunioù a zo di-
zec'het a bell zo. Ar chatal n'o deus tra da zibri,
an dud kennebeud. Ma chom an traou evêlse,
emaomp o vont da vervel. Eun naounegez spoun-
tus a zo koezet war ar vro a bez. Bez' ez eus,
neuze, eun niver brasoc'h brasa a laeroun, a rible-
rien, a glaskerien bara. Gwelit ha n'eo gwir ar pez
a lavaran. Setu unan anezo o tont aman. Nag hen
zo dister e zoare ha truezus e zremm.

*Mesraïm a zeu, eur zac'h ouz e skoaz, eur vaz
hir en e zourn, pillou roget ha lous warnan.*

16 DIVIZ

ELIFAZ, MESRAÏM.

ELIFAZ, *rust e vouez.*

Petra a fell d'it ?

MESRAÏM

Eun tammig bara ; ha pa ve zoken bihan, seac'h
ha louet, mat awalc'h e vezo evidoun.

ELIFAZ

Penaos e rafen 'ta ? Penaos e c'hellfen rei d'it
eun tamm bara p'am eus diouer anezan me va unan ?

MESRAÏM

Mat. C'houi, da vihana, a c'hell ober vad d'in
en eur c'hiz all, mar kirit.

ELIFAZ

Ha penaos ? Me ne vo ket va c'haloun ker kalet
hag an dir evidout ; rak gwall-glanv out, dioc'h da
zoare. Petra a fell d'it ?

MESRAÏM

Roit d'in eul labour bennak.

ELIFAZ

Pe seurt labour ?

MESRAÏM

N'oun ket, siouaz ! evit hel lavaret d'eoch. Me n'em eus ket labourer beteg hen, p'eo gwir e oan pinvidik bras n'eus ket pell. Mes va danvez a zo bet laeret ha lipet a bez gant torfedourien, gant mignouned fall eus ar re wasa. Teuzet eo bet va zac'had aour beteg an diner diveza o c'hoari, oc'h ober faltaziou, sorc'hennou ha diotachou a bep seurt, gand ar gwall zispignerien ze. Breman avat, roit d'in al labour a gerot, n'eus fors, peger tenn n'eus fors peger kalet e vezo, gant ma nie vezo ket diez da ober.

ELIFAZ

Mat ; eur mevel a zo ganen o tiwall ar moc'h. Te, mar kerez, a vezo gantan wardro ar vanden voc'h, mes dindan e c'halloud e vezi avat. Ne vezi ket maget ganen. Arc'hant az pezo, mez eun nebeudik bihan hepken. Prena a ri da vara el leac'h ma kiri ; mes ne brener ket a vara, er vro ma, nemet gand aour a fors, ker evel ma 'z eo. Tè raio da c'hiz.

MESRAÏM

Laouen e vezin o vont da eil vevel en ho ti.

ELIFAZ

Great ar stal. Heber, deus aman. *Heber a zeu o tougen eur baillad gwelien evit ar moc'h. Lakaat a ra e vaillad war an douar.*

17 DIVIZ

ELIFAZ, MESRAÏM, HEBER.

ELIFAZ

Selaou, Heber ; hennez a vezo, diwar-vreman, mevel dindanout, ha senti a ranko ouzit,

HEBER

Ia, mestr. Bezit dinec'h. *Elifaz a ya kuit.*

18 DIVIZ

MESRAÏM, HEBER.

MESRAÏM

Livirit d'in, mar plij, mignoun. Petra a welan er baill ze ? Eur c'houez vat a zeu dioutan.

HEBER

Petra eo ? Keuneuden ma 'z out ! Gwelien evit ar moc'h eo.

MESRAÏM

En hanñ Doue, ma ve ho madelez lezel ac'ha-noun da zibri eun tammig anezi. Mervel a ran gant va naoun.

HEBER

Daoust ha te a zo troet neat da spered, va faotr ? Kredi a rez e roin d'it souben va moc'h ? Petra a zebrint, neuze, ma tebrez te, o gwelien, hein ? Ar moc'h a zo bras o zalvoudegez, evlene, er vro ma. Mont a ran da rei o boed d'ezo. Azez aze ; me a ziskouezo d'it, divezatoc'h, al labour az pezo da ober. *Heber a gemer ar baillad hag a ya kuit. Mes-raïm a azez.*

19 DIVIZ

MESRAÏM, e unan, enkrezet.

Na peger reuzeudik oun me ! Gant gwir abeg eo en devoa, va zad karet, eun disfizians ker bras eus

al lakepoded dizoue am boa kemeret da vignoured. Ar re-ze, deac'h c'hoaz, a zo en em gavet ganen er vro baour ma. Azezet e oant, o zri, en eur c'harr alaouret, pinvidik evel ma 'z int atao. O welet ac'hannoun, o deus c'hoarzet a bouez o fenn, i hag o devoa tennet, diganen, va danvez holl. Ouspenn, skoet o deus ganen, hep truez ebet. Sell 'ta ! eur paour keaz den a zeu, davedoun, eur paotrig gantan. Ne fazian ket, va Doue ! Hennez n'eo nemet ar c'hasker bara ma 'z oun bet ker kriz en e genver hag e kenver e baotrig keaz, warlene, pa c'houlennie, diganen, eun tammig bara, e ti va zad. Barnedigez Doue a gouez warnoun hag a bouez war va ene.

Ar c'hasker bara a zeu, e baotrig gantan.

20 DIVIZ

MESRAÏM, AR C'HASKER BARA, AR PAOTRIG.

AR C'HASKER BARA

C'houi a zo ar c'hlaç'har en ho taoulagad, den paour. C'houi a zo klany, a gav d'in.

MESRAÏM

Ia, gand an naoun.

AR C'HASKER BARA

Mat ; n'ez eus ganeomp nemet eur greunen vara ; mez a wir galoun eo e roimp d'eoc'h eun tammig anezi. *Ar bugelig a ro eun tamm da Vesraïm.*

MESRAÏM

Mil ha mil bennoz Doue warnoc'h. C'houi a ziwal ac'hannoun dioc'h ar maro. Sellit piz ouzin. N'am anavezit ket ?

AR C'HASKER BARA

Eo da. Fresk beo eo c'hoaz ar zonz ac'hannoc'h em fenn.

MESRAÏM

Perak 'ta, neuze, kemend a vadelez, evidoun, eus ho perz ? Me zo bet fall meurbed, evidoc'h, warlene, ha c'houi a zo mat eus ar re wella, em c'hennver, hirio. Eun dra eo na c'hellan ket da gompren.

AR C'HASKER BARA

N'oun ket souezet. Den ebet ne c'hellfe her c'houmpren kennebeud na c'houi. Mes me, reuzeudik ha dister, me, pec'her paour evelloc'h, am eus, peb en amzer, n'ouzoun ket perak, eur beradig sklerijen bennak diwarbenn an amzer da zont.

Pa vezo diskennet, en hon touez, an Hini ma 'z eo ar Brofeded war c'hed anezan, hennez a zavo al lezen nevez ma : Grit vad d'ar re a zo bet fall evidoc'h. Rakse eo em eus roet d'eoc'h an tammig bara en deus ho tiwalet dioc'h ar maro.

MESRAÏM

Va c'haloun a drid, den Doue ! Goulen a ran diganeoc'h ma vin lezet da boket d'ho krouadurig koant. Karet a ran anezan.

AR C'HASKER BARA

Eur wir blijadur a vezo evidoun. Pokit d'ezan hervez ho c'hoant. *Mesraïm a bok d'ar bugelig.* Ha breman, kenavo. Ho lezel a ran dindan skoazel an Aotrou Doue. *Ar c'hasker bara hag e baotrig a ya kuit.*

21 DIVIZ

MESRAÏM, e unan, *tenereet bras e galoun.*

N'oun ket evit gouzany pelloc'h amzer. Va c'haloun a dorr gand ar c'heuz. Ar zonz eus ti va zad

a jom, hep ehan, e va spered. Ar weledigez dudius se a zav, bemdez, dirak va daoulagad leun a zaelou. An noz a zeu ; ema ar stered o vont da lugerni ; tud an ti a welan o tostaat ouz an daol, da goania, goude o labour pemdeziek, ha me ne c'hellan ket kaout zoken eun tammig eus boed al loened. Petra a ra breman va breur ker kalounek ha ken leal ? Petra a ra breman va zad, ma 'z-oun bet ker kriz evitan ? Daoust hag en deus atao an enkrez a rea kemend all a hoan d'e galoun ? Ia ! ia ; glac'haret neat eo atao. Ia ! her gouzout a ran ! ia ! her gwelet a ran ! Mes va glac'har a zo, breman, ker poanuis hag e hini ! Ne c'hellan mui dougen pelloc'h ar beach pounner ze.

Me a zavo, hag a yelo da gaout va zad !
Mesraim a zav hag a ya kuit.

TREDE LODEN

22 DIVIZ

GOMER, ABIMAEI.

GOMER

Me zo bras va foan, mestr kare, ouz ho kwelet oc'h huanadi hag o wela, hep ehan ebet, diwar-benn ho paour keaz mab. Ne ket maro eo ez eo, mes dianket hepken.

ABIMAEI

Me a vije bet bihanoc'h kalz va glac'har, Gomer, dirak maro va mab, eget dirak ar c'holl am eus great anezan.

GOMER

Ne lavaran ket, mes n'eus nemet eur bloavez da hirra, abaoe m'eo eat kuit, hag hini ebet ac'hannomp ne c'hellfe lavaret na zeuio ket en dro, eun deiz pe zeiz.

ABIMAEI

Gwir awalc'h eo, Gomer, ha me a zo bras va anaoudegez vat evidout, Mes daoust d'az kaloun drugarezus, va nerz a ya, a zeiz e deiz, war zisteraat ha war izelaat. N'em eus mui ken fizians nemet an hini a zeu ennoun a berz an Aotrou Doue.

GOMER

E peleac'h e c'hellfemp kavout eur fizians vrasoc'h, nerzusoc'h ha gwelloc'h ? Savet eo an heol, pell zo. D'ar poent ma eo, va mestr, ez it, bemdez, da welet ha ne zeu ket en dro ho pugel kollet. Mont a ran kuit.

ABIMAEI

Mat, va mignoun leal. N'ankounac'hain biken da vadelez. *Gomer a ya kuit.*

23 DIVIZ

ABIMAEI, e unan. *Mont a ra e goueled an teatr, o sellet a bell warzu an tu deon.*

Nag i a zo kaer oberou an Aotrou Doue ! A gleiz, koajou bras ha parkeier leun a winiz ; a zeou, ar mor glas ha dudius a vez great anezan Tiberiad. Pelloc'h c'hoaz, en dremwel, menesiou huel ha kaer o lugerni dindan ar bannou heol. Tostoc'h, dirazoun, an hent bras, an hent ma teufe va mab, gantan, beteg ennoun, mar plijfe gant Doue. Pet

gweach n'em eus ket gwelet divroidi, tremenidi, marc'hadourien, beajourien o vont hag o tont war an hent se ? Setu, a bell, an-hini kenta evit an deiz ma. Eur c'hasker bara n'eo ken. Dister ha paour Job eo, dioc'h e druillou, da vihana. Fazia a ra va daoulagad ; ia ; fazia reont ; mes perak 'ta e sav ennoun, en despet d'in, n'ouzoun ket petra, eur seurt follentez, eur seurt laouenidigez ha n'hellan ket da gompren. Tostaat a ra, buhan, buhan, buhanoc'h buhana ! Ne fell ket d'in gervel den..... Nan ! ne fell ket d'in..... *En em harpa a ra ouz ar voger.* Mez harpit ac'hanoun, va Doue..... va Doue karet..... Emaoun o vont da goueza ! *A vouez krenv bras* Va mab ! Va mab ! Va mab eo ! *Mesraïm a zired, koz tammou dilhad ha truillou warnan. Teurel a ra, pell, e vaz hag e zac'h klasker bara. E dad a red davetan da boket d'ezan. Mesraïm a vir outan n'her grafe.*

24 DIVIZ

ABIMAEI, MESRAÏM.

MESRAÏM, *oc'h en em strinka war e zaoulin, hag o kroaza e zaouarn.*

Va zad ! va zad mat ha karet ! Pec'het em eus a enep d'an env hag a enep d'eoc'h. N'oun ket talvoudek da veza ho mab hiviziken. Kemerit ac'hanoun da vevel en ho ti. Ha ne bokot ket d'ho mab glac'haret, ken n'ho pezo pardounet anezan !

ABIMAEI

Pardouni ac'hanout, va mab ! pardouni ac'hanout ! Pardounet em eus d'it a bell zo ; pardounet em eus d'it abaoe an deiz kenta, abaoe an deiz doanuis ma 'z ejout kuit diganeomp. Deus da boket d'in, va mab, va bugel a garan muioc'h-mui, ha

goulen, digant an Aotrou Doue, na varvin ket etre da zivreac'h gand eur joa re vras. *Mesraïm a zav, hag a bok start ha pell d'e dad.* Gomer, deus buhan ha buhan. *Gomer a zeu.*

25 DIVIZ

AN HEVELEP RE, GOMER.

GOMER, *souezet bras.*

Ra vo benniget da viken hon Doue leun a vadelez ! Ra vo benniget ive Mesraïm o tont en dro !

ABIMAEI

Kleo, Gomer. Gwiska a ri va mab gand ar zae gaer meurbed en deveze gwechall. Rei a ri d'ezan boutou nevez eus ar re vraoa ha lakaat a ri ouz e viz eur walen aour fin. Digas a ri aman al leue lart hag hel laza a ri ; ha dibri ha raimp hag en em laouenaat. Rak va mab a oa maro ha sevel en deus great a varo da veo ; dianket e oa hag em eus her c'havet adarre.

An holl a ya kuit nemet Abimael. Hadar a zeu, kanerien gantan.

26 DIVIZ

ABIMAEI, HADAR, AR GANERIEN.

HADAR, *o saludi.*

Ni a fellfe d'eomp gwelet, mar plij, perc'hen an ti man.

ABIMAEŁ

Me eo.

HADAR

Ra ziskenno warnoc'h, mestr, bennosiou santel an Aotrou Doue. Kanerien omp, o vont hag o tont, bemdez, tu ma, tu hont. Hor micher ni eo kana epad an eureujou, ar banvesiou ar festou a bep seurt.

Etouez mil ha mil ganaouen a ouzomp, unan zo ha na gavjed ket he far diwarbenn distro ho mab karet. He c'hana a raimp, epad ho panvez, mar plij ganeoc'h.

ABIMAEŁ

Kanid dioc'htu, ma welin ha c'houi a zo kaer ho toare kana.

HADAR

Eaz eo, mestr. Plijadur ho pezo, fizians am eus.

KAN AN DISTRO

WAR DON : *D'hor mamm Santez Anna.*

AN HOLL

DISKAN Doue leun a vadelez
D'eoc'h c'houi e kinnigomp
Eur c'han a garez ;
Selaouit ac'hanomp.

HADAR

An danvadig kollet
A zistro en hor c'hreiz
Yac'h, laouen ha tennet
Dioc'h skilfou kriz ar bleiz.

AN HOLL

Doue leun.....

HADAR

Mil ha mil drugarez !
An hini oa maro,
En em gav a nevez
Gand e dud, en e vro.

AN HOLL

Doue leun.....

HADAR

Ar bugel a garit,
Tad mat, hiviziken,
Her gouzout mat a rit,
N'ho tilezo mui ken.

AN HOLL

Doue leun.....

HADAR

Eul levenez dispar
En hon touez a zroll
O kas kuit ar c'hlaç'har
Pell dioc'h kaloun an holl.

AN HOLL

Doue leun.....

HADAR

Ar c'han ma a ganer
Bravoc'h c'hoaz en envou,
Pa zav gand eur pec'her
Keuz bras d'e bec'hejou.

AN HOLL

Doze leun.....

ABIMAEŁ

Brao ! brao ! tud vat. Ho mousesiou a zo dudius kenan da gleuet. Ho pidi a ran da jom da leina ganeomp. Goude ar banvez e kanot ar ganaouen ze ha re all, ouspenn. It d'ar gear, mar plij, d'am gor-toz.

Hadar hag ar ganerien a ya kuit.

27 DIVIZ

ABIMAEŁ, e unan, o sellet ouz an env.

Penaos e c'hellin ho trugarekaat, c'houi, va Doue, hoc'h eus kaset d'in kemend a eurusded goude kemend a dristidigez. Ho pinniga a rin, bemdez, bete ma varvin. *Elam a zeu.*

ABIMAEŁ, ELAM.

ELAM

Petra eo deoc'h, va zad, binniga an Aotrou Doue gand eur galoun ker birvidik ? Ha klevet em eus, o tistrei d'ar gear, ar zonerien o kana kaer. Perak 'ta ? Unan eus hor mevelien en deus hel lavaret d'in. Va breur a zo distro hag evitan eo a rit

eur banvez ha n'en deus ket e bar. Mat ; labouret em eus ganeoc'h epad meur a vloavez, ha morse n'hoc'h eus roet d'in pa ne ve nemet eur c'havrig da leina gant va mignoured. Evit Mesraïm avat, evit ar gwall-zispigner ze, gourc'hemen a rit ma vezo lazet al leue lart. Ne c'hellin biken, me, dida-mall va breur.

ABIMAEŁ

Rei a ri ar pardoun d'ezan, va mab ; her goulen a ran diganez en hano Doue, e kreiz al levenez a ziroll en hor c'halounou. Te a oarvat ; kement tra zo va hini, er ti man, a zo ive da hini ; ar pezh a zo d'in a zo d'it. Digor d'az preur da zivread'h ha da galoun, rak, evel m'em eus lavaret d'ar re all, maro e oa ha beo eo, dianket e oa ha kavet eo. Setu hen o tont. Pok d'ezan.

Mesraïm a zeu, gwiskamanchou dispar warnan, ar vevelienn holl ouz e heulia. Elam en em strink en e zivread'h, hag a bok d'ezan.

28 DIVIZ

AN HOLL, ABIMAEŁ.

ABIMAEŁ, d'an dud.

Araok ar banvez, va bugaleigou, c'houi hag a zo holl va muia karet, klevit ar pezh en deus da lavaret d'eoc'h, e berr gomzou, eun tad hag a zo e galoun leun a eurusded, e zaoulagad leun a zaelou a levenez. Klevet ha gwelet hoc'h eus buez va mab karet. Pep hini ac'hanomp, siouaz ! a c'hell, eun deiz pe zeiz, dont da yeza eur mab foran eveltan.

Mat ; arabad e vezo, d'ezan, fall galouni. N'eus fors peger bras, n'eus fors peger stank e vezo e

bec'hejou, mar deus en e galoun eur c'heuz gwir
d'ezo, an Aotrou Doue a roio d'ezañ eun digemer
laouenoc'h c'hoaz eget an hini en deus bet va mab
etre va divreac'h.

Ar goel a zisken.

